

D'an 31 a viz Eost

- Er Iañ kantved, sant Jozef Arimatea, diskibl an Arloz. Genidik eus Arimatea, e oa ezel eus ar Sanedrin ha moarvat kar da Jezuz. Eñ eo a serras korf ar Salver, en goloas gant al liñsel, hag en lakaas en ur bez nevez en doa savet evitañ e-unan. Hervez an hengounioù ez eas da aviolañ Enezenn-Vreizh lec'h ma savas kumuniezh Avallon. Meur a chapel ha skeudenn a zo gouestlet dezhañ e Breizh-Vihan.
- War-dro 150, en Athena, sant Aristid, feizvonnour. Hervez danevell Euzebe e oa ur prederour pagan anezhañ a-raok dezhañ entuañ gant ar C'hrist. D'an impalaer Hadrian e kinnigas ur skrid difenn lec'h ma tiskouez nevezded ar feiz kristen mammenn a c'hoanag hag a garantez. Troet e voe e sirieg, en armenianeg hag e gresianeg.
- War-dro 260, e Kappadokeia, merzherenti sant Teodod ha santez Rufina. Hag int kristenion feal eus Gangra e Paphlagonia en Azia-Vihanañ e voent harzet en abeg d'o feiz hag e varvjont en toullbac'h o lezel o babig nevez ganet, a voe sant Mammaz meulet gant sant Bazil ha gant sant Gregor Naziañs.
- E 358, sant Paolin a dTrier, eskob ha merzher. Feizvonnour didrec'hus feiz Nikaia hag aduad sant Atanaz dirak an impalaer ariat Constantius da geñver Senez Arles, e voe harluet e Frijia lec'h ma varvas gwallgaset. Meur a dad eus an Iliz o deus graet meuleudi eus e feiz dibleg ha dalc'hus.
- Er VIIvet kantved, santez Kutburg (Gg. Cutburge), rouanez Norzumbria e bro Saoz, gwerc'hez, abadez, merc'h sant Kezwal ha breur sant Ina, diazezourez manati Winnkburn.
- E 651, sant Aezan Lindisfarn, abad-eskob, abostolour Norzumbria, un tiriad breizhek anezhañ bet faezhet gant ar Saozon. Iwerzhonad ganet moarvat e Connaught ez eas da vanac'h en enez Iona e Bro-Skos. Oswald, deuet da vezañ roue Norzumbria a c'houlennas un avielour evit e sujidi hag e voe anvet Aezan a savas ur manati war enezenn Lindisfarn. Goude marv Oswald e voe hapet gant Oswin eus Deira.

D'ar 1 a viz Gwengolo

- Er IVre kantved, en Argovia, santez Verena, gwerc'hez ha penitiourez. Genidik eus Tebaid en Egipt, e tegouezhas e Milano gant kristenion all da heul sant Maoris hag e geneiled eus legion Tebez (Bro-Egipt). Pa voe drouklazhet ar re-se e Acaunum (hiziv Agaune) e Bro-Suis, e teuas war al lec'h hag en em dennas da c'houde evel penitiourez e Solothurn (hiziv Soleure) lec'h ma oa bet merzheriet sant Ours ha sant Viktor. Eno e pareas ar gouarnour roman en doe he zaolet d'an toullbac'h. Echuiñ a reas he buhez e Zurzach war ar Roen e kanton Argovia.
- Er IVre kantved, merzherenti sant Priz (Lt Prisca; Gl. Prisque, Prix), eskob kentañ Capua e Campania, bet merzheriet a-gevret gant sant Priscilianus. Lidet d'ar 17 a viz Meurzh gant ilizoù ar Reter.
- War-dro 570, distro da Zoue ene sant Koñstanz, eskob Aquino el Latium. Meulet eo bet gant ar pab sant Gregor en e Gendivizoù dre ma pleustre donezon an diouganañ.
- E 623, ganedigezh en neñvoù sant Loup (pe c'hoazh Leu e galleg), eskob Sens. Anvet eskob e 609, e enebas ouzh emvennadoù ar roue gall Klotar II a felle dezhañ kemer Sens, hag en abeg da-se e voe harluet. Diwar emsavadeg ar bobl evit o fastor e plegas ar roue hag e skoazellas an eskob mat da sevel manati Santez-Kolomba.
- E 721, sant Jili, abad. Gresian a orin, e voe penitiour e Lengadok e-kichen Nîmes lec'h ma savas ur manati a gemeras e anv goude e varv hag a voe brudet-kenañ war hent Kompostella.
- Er VIvet kantved, sant Silin, tiern e Kembre, aet da benitiour en enez Von. Meneget e vez e diell-levr Landevenneg.
- En Iwerzhon, sant Nevin, eskob, sant Sceallan (Skellan), lesanvet "Al Lovr", manac'h en Ard Macha.
- Kounidigezh Merzherion an Dispac'h Gall e Breizh.

D'an 2eil a viz Gwengolo

- Er IVre kantved, en Apamea e Siria, merzherenti sant Antonin. Hag eñ benour mein, ugent bloaz dezhañ, e nac'has kizellañ idolennoù pagan hag en abeg da-se e voe lakaet d'ar marv.
- Goude 381, distro da Zoue ene sant Just, eskob Lugdunon (Lyon). Goude senez Aquilea e tilezas e garg evit en em dennañ gant al lenner sant Viator e gouelec'h an Egipt lec'h ma vevjont meur a vloavezh kevredet ouzh pedenn ar venec'h. O relegoù a voe treuzkaset da Lugdunon.
- War-dro 657, e Bro-Saoz, santez Hioù (Hieu, Heiu, Eiu pe Helena), abadez. Ganet e Norzumbria e voe skoliatet gant sant Aizan Lindisfarn hag e resevas gouel ar gwerc'hezed digantañ. Sevel a reas ur manati e Hartlepool lec'h ma voe warlerc'hiet gant santez Hilda. Da c'houde e voe abadez e Tadcaster e Bro Evrog hiziv Yorkshire, hag e vije bet neuze abadez kentañ Norzumbria.
- E 1231, ar gwenvidik Brocard, priol penitiourion Menez Karmez ma roas sant Alberzh, eskob Jeruzalem, ur reolenn dezho da chom deiz ha noz o veveriañ lezenn an Arloz hag o veilhal er bedenn.
- E 1282, ganedigezh en neñvoù santez Ingrid a Skanninge, intañvez. Dre he mamm e oa merc'h vihan ar roue Knut a Sveden. Ur wezh intañvezet e reas ur birc'hirinadenn d'al Lec'hioù Santel ha war an distro, o tremen dre Roma, e c'hounezas digant ar pab an aotre da ziazezañ ur gouent leanezed kloastret en he bro. Skoazellet gant he breur a oa marc'heg teutonek e tigoras neuze ur gouent tredeadezed Sant-Dominig lec'h ma wiskas ar ouel.
- E Breizh, er IVre kantved, sant Eneour, abad-eskob. Genidik eus enezenn Vreizh (Kembre) e vije deuet da Vreizh-Vihan er pevare kantved war un dro gant e c'hoar santez Tunvez a zo anavezet evel keneilez santez Ursula. Dilestret o dije e Tremeog er Vro-Vigouden. Eneour a savas e beniti lec'h m'emañ parrez Ploneour bremañ.
- Er VIvet kantved, santez Yaouank, c'hoar sant Gwenvael.
- En Iwerzhon, er VIvet kantved, sant Senan, manac'h e Cill Dara, sant Mainne, lesanvet "Dorn Garv", manac'h, santez Molotha (Meuled), maouez santel.
- Merzherion wenvidik Miz Gwengolo, lazhadeg e Pariz e 1792, pergen e kouent Karmezidi ha Kloerdi Sant-Firmin, anezho 191 merzher drouklazhet e 1792 da vare an Dispac'h Gall, anezho 3 eskob, 187 beleg hag un den lik, a zo bet disklêriet evel merzherion gant ar pab Pius XI, d'ar 17 a viz Here 1926, evit bezañ nac'het touiñ al le da Vonreizh Drevourel ar Gloer. En o zouez e kaver beleion eus Breizh:
 - Eus eskobiezh Kernev :
 - An Aotroù Visant Rousseau, beleg eus Keneilezh Jezuz, genidik eus Kastell-Nevez-ar-Faou.
 - An Aotroù Nikolaz Verron, beleg eus Keneilezh Jezuz, genidik eus Kemperle.
 - An Tad Frañsez Yasent Le Livec, beleg eus Keneilezh Jezuz, genidik eus Kemper.
 - Eus eskobiezh Leon :
 - An Tad Glaoda Laporte, beleg eus Keneilezh Jezuz, genidik eus Brest.
 - Eus eskobiezh Landreger :
 - An Aotroù Erwan-Andrev Guillou a Geranrun, genidik eus Brest.
 - An Aotroù Reun-Jozef Urvois, eus parrez Sant-Mikael Gwengamp
 - Eus eskobiezh Sant-Brieg :
 - An Aotroù Erwan-Yann-Bêr Rey a Gervizig, eus parrez Plounez.
 - Eus eskobiezh Roazhon :
 - An Aotroù Juluan Eosten Poulain Delaunay, kelenner e Skolaj Roazhon.
 - An Aotroù Loeiz-Laorañs Gaultier, aluzenner Ospital an dud dibare e Pariz.
 - Eus eskobiezh Naoned :
 - An Aotroù Herri-Aogust Luzeau de la Mulonnière, genidik eus Sulieg.
 - An Aotroù Joseph Becavin, genidik eus Kerc'hfaou ha ne oa nemet 25 bloaz.
 - An Aotroù Charles du Cornillet.
 - An Aotroù Yann-Karl-Mari Bernez du Cornillet, genidik eus Kastell-Briant, beleg Chaloned Reoliek Sant-Viktor.

D'an 3 a viz Gwengolo

- Er Iañ kantved, merzherenti, sant Antonin ar Rouergad, beleg ha merzher. Urzhiet beleg gant ar pab sant Klemes, e voe kaset gantañ da avielañ Galia a-gevret gant sant Denez. Mont a reas davet ar Ruthened hag e voe merzheriet e-kichen Pamiers.
- War-dro 126, e Roma, merzherenti santez Seraphia. Matezh santez Sabina e oa pa voe lakaet d'ar marv en abeg d'he feiz da vare Valerianus.
- D'an 12 a viz Meurzh 604, e Roma, distro da Zoue ene sant Gregor Veur, pab, Doazhour eus an Iliz. Goude bezañ bet prefed Roma en em roas d'ar vuhez vanac'h en e zomani war venez Caelius. Galvet gant pobl Roma da vezañ pab, en em roas a-grenn d'e garg. Kas a reas menec'h da avielañ ar Saozon, reizhennata a reas al liderezh. Dre e gKendivizoù e vroudas ar vanac'helezh o vrudañ buhez sant Benead.
- War-dro 670, sant Remakl (Lt. Remaclus), abad-eskob Stavelot. Da gentañ manac'h e Luxovium e tiazetas war c'houlenn sant Eloa manati Solignac e Bro-Lemojez ha da c'houde e koadeier an Arden ur manati e Corbion e Belgia ha manatioù daouel Stavelot ha Malmédy.
- War-dro 675, merzherenti sant Avoul (pe Aigulphe), abad. Genidik eus Bleaz (Blois) e Bro-C'hall, ez eas da vanac'h en abati Fleury lec'h ma kemeras perzh e treuzkas relegoù sant Benead. Kaset e voe da dreizhañ abati Sant-Honorat ha da c'houde e voe anvet abad Lerina. Eno e savas menec'h enep dezhañ, harpet gant eskob Uzes : bac'het e voe, troc'het e deod, toullet e zaoulagad hag en dibenn roet gant tri menec'h ha tregont da breizhaterion o lazhas war enezenn Kapraia.
- E 775, sant Godegrand, alias Chrodegang, eskob Seez (Sées), mab kont Osma, gwezhall kêrbenn meuriad kelt an Esuviz, breur gevell santez Opportuna. Lazhet e voe gant un den kar gwarizius war hent Almenêches p'edo o tistreiñ eus ur birc'hirinadenn da Roma.
- D'an hevelep deiz, 75 Merzher Pariz, e 1792, da vare an Dispac'h Gall, beleion evit an darn vrasañ anezho. Antronoz lazhadeg kouent ar Garmezidi, e voent lazhet d'o zro, hep bezañ barnet, e toullbac'h ar Force hag e kloerdi Sant-Firmin troet e karc'har.
- War enezenn Vreizh (Kembre), er VIvet kantved, sant Kadvan, abad Enlli e Kembre, mab Eneas Ledewig alias Budig Kernev ha santez Gwenn, breur sant Kebi, ha kenderv sant Padarn. Goude studioù uhel ez eas da veleg hag e oa abad pa heulias sant Garmon da-geñver e eil beaj da enezenn Vreizh evit stourm enep da falskredenn Pelagius. Goude bezañ diazezet manati Tywyn (er Merionethshire a hiziv), en em dennas evel penitiour war enez Bardsey er Gwynned hag e savas abati Enlli evit e ziskibled. E Kembre e vez kehelet evel patrom ar gadourion hag evel merzher dre-benn d'ar poanioù gouzañvet gantañ evit difenn ar gwir feiz. E Breizh eo eñ a gaver patrom iliz Poullan er C'hab-Sizhun met eno e lavarer e oa diskibl sant Gwennole.
- War enezenn Vreizh (Kembre), er VIvet kd., sant Konan, diskibl sant Kadvan. Sant Konan a voe diskibl sant Kadvan en abati Enlli a-gevret gant sant Mael ha sant Sulian. Marteze e oa genidik eus Kembre pe e oa ur Breizhad anezhañ evel Kadvan, hervez hengounioù Kembre, hag e vefe eus e geneiled aet gantañ eus Breizh-Vihan da Gembre. Bez' e c'hellfe bezañ sant-anver parrez Sant-Konan e Kernev-Uhel met meur a sant Konan a zo e Keltia...
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Kuñvan (Iw. Caomhan), penitiour e Ceanannas (Kells), badezet gant sant Padrig; sant MacNios, abad Ceanannas, badezet gant sant Padrig.
- E Breizh, e 1847, e Begnen e Bro-Gwened, distro da Zoue ene Perina Samson, diazevourez Leanezed Sant-Jozef Kermaria.

D'ar 4 a viz Gwengolo

- War-dro 117, en Efezos, merzherenti santez Hermiona, gwerc'hez ha merzherez, lesanvet "Rozenn Efezos". Bez' e oa merc'h Fulub an diagon anvet « avielour » e Oberoù an Ebestel: «Peder merc'h en devoa, gwerc'hezad ha diouganerezed» (Ob 21,8-9). Gant he c'hoar Eutychia ez eas da Efezos lec'h ma voe degemeret gant sant Petrenios. An implaer Trajan, deuet eno da vrezeliañ ouzh ar Bersed, a glevas anv anezhi hag he lakaas da dremen dirak al lezvarn ha dinac'hañ he feiz.

Hermiona a ziouganas e vefe trec'h war ar Bersed hag e kouezhfe ar galloud goude e varv etre daouarn e zeuñv Hadrian. Hemañ he galvas dirak e lezvarn hag e voe skourjezet betek ar marv. O c'hoar santez Iriz a zo sebeliet e Gerapolis en Asia Vihanañ.

- War-dro 125, merzherenti sant Thamel hag e geneiled. Thamel a oa beleg un doue pagan, ne ouezer ket dres pelec'h, er Reter, pa voe gounezeet d'ar C'Hrist. Da vare heskinadeg Hadrianus e voe harzet ha lakaet d'ar marv en abeg d'e feiz a-gevret gant e c'hoar ha pevar pe bemp kristen all.

- Er IV re kantved en Italia sant Marino. Hag eñ benour mein genidik a Vro-Dalmasia e labourer da savidigezh iliz ha ramparzhioù Rimini. Urzhiet diagon e renas ur vuhez a benitiour war ar roc'h ma voe savet diwezhatoc'h ar gêr e gemeras da sant paeron.

- E 422, e Roma, sant Bonifacius Iañ, pab. Gouzout a reas degas peoc'h da geñver rendaeloù a-zivout reoliadur an Iliz. Hervez an hengoun e eskobas sant Ninian hag er c'hasas da avielañ Pikted Breizh-Veur.

- E 1170, e Palermo e Sikilia, ganedigezh en neñvoù santez Rozalia, gwerc'hez. Merc'h ar brientin Simbald, diskennad Karloman, e tec'has diouzh ti he zad d'he fevarzek bloaz, dre ma felle dezhi chom hep dimeziñ, da heul un emziskouezadenn eus ar Werc'hez Vari. Tremen a reas c'hwezek bloaz diwezhañ he buhez en ur c'hev eus Monte Pellegrino maget dre an eukaristia a veze kaset dezhi gant an aeled.

- E Kembre, er VIIvet kantved, santez Rhuddlad, gwerc'hez. Enoret e enezenn Anglesey, paeronez Kêr-Llanrhyddlad war dor torgenn Moel Rhyddlad en eskobiezh Bangor.

- En Iwerzhon e 657, sant Ultan Ardbraccam, abad hag eskob Ardbraccam war-lerc'h sant Breccan war-dro 570. Edo eus tiegezh roueel O'Connor, eontr a-berzh mamm santez Berc'hed. Dastum a reas skridoù Santez Berc'hed, sevel ur roll eus he burzhudoù hag ur meulgan en he enor. Meulganoù all a savas en o zouez Christus dans insula nostra a gaver el Liber Hymnorum.

- En Iwerzhon, er VIIIvet kantved, sant Comgal, manac'h e Inis Eonáin.

- E Breizh e 1653, distro da Zoue ene C'Hoar Anna-Maria a Jezuz Kroazstaget, Anna de Goulaine eus he anv plac'h yaouank, ganet e kastell Poulmig nepell diouzh Kraozon e Kernev, leanez e manati Beneadezed ar C'halvar e Pariz. Dre hanterouriezh an Tad Joseph du Tremblay, he c'hoñfesour, e kemennas d'ar roue Loeiz XIII e felle d'an Aotrou e vefe gouestlet ar rouantelezh d'ar Werc'hez Vari pezh a voe graet d'an 10 a viz C'hwevrer 1638.

D'ar 5 a viz Gwengolo

- E 370 e Bitinia, merzherenti ar sent Urban, Teodor, Menedem hag o c'heneiled. En abeg d'o fealded ouzh ar feiz katolik e voent bodet war ur vag a voe tangwallet en donvor war urzh an impalaer ariat Valens.

- Er Vvet kantved, e Persia, merzherenti sant Abda, eskob Hormizd. Galvet e voe dirak ar roue Jezgerd ha dre ma nac'has azeuliñ an heol e voe skoet betek ar marv gant bizhier tanflammet. Adalek neuze e krogas an heskinadeg veur a badas ouzhpenn tregont bloaz.

- War-dro 698, distro da Zoue ene sant Bertin, abad. Ganet e Constance en Helvetia, ez eas da vanac'h e Luxovium da vare sant Koulman hag e voe kaset davet sant Omer eskob Terwaan e Flañdrez evit e skoazellañ da avielañ paganed ar rannvro. Gant sant Mommelin e tiazezas abati Sithiu lec'h m'emañ bremañ kêr Saint-Omer.

- E 1997 e Calcutta, ganedigezh en neñvoù santez Mamm Tereza, gwerc'hez ha diazevourez. Eus Albania he bro c'henidik e voe poulset gant ar garitez da zispelc'hiñ sec'hed ar C'hrist kroazstaget en e vreudeur baourañ en India hag e tiazezas Kongregadur Misionerion ar Garitez e gwazerezh an dud klañv ha dilezet. Gwenvidikaet e 2003, c'hwec'h bloaz goude he marv, e voe santelezet kerkent hag e 2016.

- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Eolan, manac'h, diskibl ha kofezour sant Fionnbarr.

D'ar 6 a viz Gwengolo

- Er Iañ kantved, merzherenti sant Onesiphor, meneget gant sant Paol en e eil lizher da dTimozeoz (2 Tm 4,19). Skoazellañ a reas an Abostol en Efezoz hag e teuas d'e harpañ pa oa karc'harier e Roma betek bezañ galvet d'e dro da reiñ testeni d'ar C'hrist dre ar verzherenti.- Er VI vet kantved, sant Manoald (Lt. Magnoaldus, Gl. Magne), abad. Keneil sant Koulman ha sant Gall, e tiazegas abati Füssen e Souab Bavaria lec'h ma kave bod ar birc'hirined o vont da Roma a-raok krapañ gant odeoù an Alpoù.
- War-dro 632, sant Cagnoald, eskob Laon. Breur santez Faron, eskob Melda (Meaux) ha santez Fare, e voe manac'h e Luxovium dindan sant Koulman hag e yeas d'e heul pa voe harluet e Bregenz. Anvet eskob Laon, e kemeras perzh e senez Reims e 625, hag e savidigezh abati Solignac e-kichen Kêr-Lemojez.
- E 1230, ar gwenvidig Beltram de Garrigues, beleg. Bez' e voe unan eus keneiled gentañ sant Dominig hag e tiazegas kouentoù e Pariz hag e Provañs.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Tegoneg, pe Koneg (Lt. Teconocus), abad, diskibl sant Paol Aorelian.
- E Breizh, en Devnon, er VIIvet kantved, sant Okantvedumal pe Oedmal, warlerc'hier sant Kiferian war sez Aled etre 641 ha 644.
- En Iwerzhon, santez Skoued (Iw. Sciath), maouez santel.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Cionnoit (Kenez, Kb. Cenydd, Sz. Kenneth), eskob e bro Dulenn.
- En Iwerzhon sant Caonchomhrac (Kungevrank), 929, manac'h e Dóire.
- Er VIIvet kantved, santez Bee (Gl. Bègue), gwerc'hez. Ganet en Iwerzhon en un tiegezh tierned e tec'has evit chom hep dimeziñ hag e erruas en un doare burzhudus war aodoù Cumbria e Bro-Saoz a hiziv. Aliet gant sant Oswald ha sant Aizan a zegemeras he gouestloù, e vebas en ur peniti hag e tiazegas ur manati.
- E 1637 e Gwened, treuzlec'h relegoù sant Visant Ferrer.

